




# bremañ

niv. 0 meurzh-ebrel 1980 2 lur



# PLOGO, KOLWEZI, MEMES BREZEL!

Ur miz dija abaoe derou an enklask e-touesk tud Plogoñv, Kleden ar C'hap, Goulien ha Priveilh, war dalvoudegezh ur greizenn nukleel an Aod Vrein, e-kichen porzh Feunteun Aod e Plogoñv. Ur miz brezel bihan diehan, ar re gozh e-giz ar re yaouank, an holl, noz-deiz, o vrezeliañ a-enep "an torfed diwezhañ enep an Natur" evel ma lavar P. Laurent, rener kozh an U.R.B.E., an holl unanet enep gwaske-

rezh ar stad c'hall. "Biskoazh kement all !" a soñj an archerien. Ha pemzektez da chom aze c'hoazh da ziwall daou di-kêr war rodoù ha nez a den, koulz lavaret, da welet anezho ken. Pemzektez brezel c'hoazh ha brezel e gwirionez an taol-mañ, rak "re bell int aet" evel ma lavar tud Plogo, ya, re bell war hent ar gwaskañ hag ar skeif. "N'int ket tud ar re-se o skeif evel ma reont, loened, chatal ya!"

## HARZOU

"Ne fell ket deomp eus a greizenn, ne fell ket deomp eus an enklask" a lavare Y.V. Kerloc'h, maer Plogoñv. Nac'h an enklask ! E Braud St Louis e-kichen Bourdel, e oa bet graet kement-se hag er Pelle-rin ivez warlerc'h, met amañ e Plogoñv an afer-se he deus paket ul liv dispac'h e gwirionez. Evit tud Plogoñv, degemeret an enklask hep laret grik a oa lakaat un troad e toull Kurun "demokratelezh Giscard". 2 vunutenn da bep hini e Plogoñv evit sellet ouzh un doser enklask hanter kant pajenn. "Un enklask toull", a lavaront "hag an disoc'h anezhi anavezet en araok". Deuet int memestra en noz teñval, e kreiz miz Genver da begañ ar skritell a lavare e oa an enklask da vezañ dalc'het eus penn kentañ miz C'hwevrer betek ar bevarzek a viz Meurzh. Deuet int gant 17 karrad archerien pa ne oa den ouzh o gortoz. Roget eo bet ar skritell an devezh war-lerc'h ha devet an holl baperioù ofisiel.

Met pemzektez war-lerc'h d'an 31 a viz Genver da 9 eur vintin, en em staliont war ar gumun, goude bezañ ranket digeriñ un hent e-pad 4 eur-vezh e-touez ar mein, ar



Luc'hskeudenn Ritva RENQUIST / Cathy GEFFROY

c'hirri kozh, ar peulioù houarn, ar rodoù hag al loustoni a oa bet lakaet da herzel outo.

"E-pad 6 sizhun e vo ret deomp padout" a lavare Annie Carval ha den n'he c'hrede. Abaoe n'eus ket bet un devezh hep ma vije trouz ha maged. Evit tud ar c'hap, an armead

archerien a zo deuet d'ober war o zro, gant tankoù, mindrailherezioù, kanolioù dour, grenadennoù a bep seurt, a zo un armead alouberien, ha n'he devo paouez ebet keit ha ma vo staliet war zouar ar gomun. An archerien o-unan a zo souezhet gwelet kement-se. Kunujennet a bep tu, lod o deus ranket kuitaat, o nervernoù aet skuizh, lod all a orin eus ar vro ha brezhonegerien war ar marc'had, a zo bet kaset e lec'h all ivez rak anavezet gant tud ar vro. Met morse n'o deus gwelet kement all diouzh o lavar dezho o-unan.

## HARZADEGOU

Er penn kentañ e teuent diouzh an noz - pa ne oa tra ebet ken da ziwall- goude 10 eur, da welet hag-efi oa sioul pep tra hag evit diskouez o nerzh. Kement-se n'eo ket bet evit plijout da dud Plogoñv ha diouzh ar Gwener 8 da noz, an holl a oa ouzh o gortoz a-dreñv ar c'hleuzioù. Aze eo bet paket Eugène Coquet (1 miz hanter toull). An archerien o doa paket o fegement memestra hag abaoe ne vezont ket gwelet ken warlerc'h 5 eur abardaez. D'an 19 a viz C'hwevrer eo bet tro Clet Ansquer da vezañ harzet, efi ivez sañset o strinkañ mein. Lavaret ez eus bet ivez e oa

Luc'hskeudenn Ritva RENQUIST / Cathy GEFFROY





Luc'hskudenn Ritva RENOUIST / Cathy GEFROY

Carval a c'houlenn en dibenn e vefe graet un enezenn eus Plogoñv evit miret outo da zistreiñ an devezh war-lerc'h. Pezh 'zo bet graet raktal. Betek 5 eur vintin o deus savet harzoù : gwez diskaret war 3 km etre Kleden ha Plogo, danvez-tarzh e Pont al Loc'h met... Ne oant ket hep gouzout n'eus forzh penaos e vefe deuet a-benn an archerien da zigerif un hent bennak, met evel ma lavare unan kozh e-kichen : "Ret eo diskouez dezho petra omp gouest d'ober". 3 all a zo bet paket an nozvezh-se memestra, rak ma ne c'helle ket tremen ar c'hirri, ar soudarded int-1 a c'helle bale. Aet int d'an dud war droad goude bezañ deuet dre ar mor, an aon en o c'hreiz da bakañ un taol fuzuilh.

**HARZ-TENNADEGOU**

Maz eo chomet koulz lavaret nannfeuls ar brezel e Plogoñv, ez eo a-drugare da dud Plogoñv ha netra ken.

Rak diouzh tu ar galloud ne c'hortozer nemet un taol fuzuilh evit skeifl muioc'h, gwelloc'h hag efedusoc'h.

Paz eo bet goulennet digant Jourdan ar prefed tennañ kuit an archerien eus Plogoñv en deus kaset reoù fresk ouzhpenn. Pep hini a oar bremañ e c'hell bezañ toullbac'het en ur vont da Blogoñv. An Ao. Constant e Kemper e fell dezhañ lakaat poblañs ar C'hap a-bezh en toull.

Chom a ra dek devezh c'hoazh. Un dra 'zo sur, ne c'heller ket diouganaf evit ar pezh a c'hell c'hoarvezout. Ur vanifestadeg a vo d'ar Yaou 6 a viz Meurzh dirak al lezvarn da gefiver prozez ar re a zo bet paket d'ar Gwener 29 a viz C'hwevrer ha d'ar Sadorn lañ a viz Meurzh. Hiriv eo 4 all a zo bet paket da 6 eur ½ vintin, sachet eus o gwele e Pontekroaz hag e Gwaien. Pelec'h ec'h echuo ? Den ne oar. An harz-tennadeg (couvre-feu) n'eo ket bet diskleriet c'hoazh.

**E LEC'H ALL...**

Stourm Plogoñv n'eo ket stourm Plogoñv nemetken. Deuet eo da vezañ stourm an holl e Breizh hag o welet pegen dister e chome plas ar c'heleier war Blogoñv, er c'hazetennoù rannvro zoken, ur strolladig a dud eus bro Gemper (Skol An Emsav, P.S.U. CRIN) en deus soñjet e oa ret kas keloù war eeun d'ar Vretoned. Tro-Breizh Plogo a zo bet a-bouez rak hiriv eo un tregont "Komite Plogo" bennak a zo en o sav hag a stourm en o c'horn bro. E Plouarzel hag e Plonger d'ar Sadorn 1 a viz Meurzh an tiez-kêr a oa sarret hag ur banell "Plogo" lakaet e plas ar panelloù Plouarzel ha Plonger. An Tro-Breizh en deus lakaet ivez 15 ti-kêr da gemeret un emzalc'h sklaer war-lerc'h bezañ bet kelaouet gant Pierre Serjent ha Guy Yvenou.

Kendalc'h p. 6

Luc'hskudenn Ritva RENOUIST / Cathy GEFROY

bet kavet ur c'hoktail molotov en e gichen, pezh en deus nac'het atav. Ar miz toull en deus paket d'ar 27 e Lezvarn Kemper ne seblant ket bezañ trawalc'h evit ar prokolor rak galvet en deus endro.

**HARZLAMMADEGOU**

D'an 20 a viz C'hwevrer, pa veze dija koulskoude difennet mat an tiez-kêr war rodoù ec'h en em gav e Plogoñv harzlammerien (parachutisted) Mont De Marsan a ya d'an emgann o taboulinañ hag o vlejal. Ur skouer ouzhpenn eus faskouriezh ar pennoù bras e Paris. En em c'houlennet hon eus hag-efñ oa deuet Giscard nevez 'zo da Blogoñv da welet Y.V. Kerloc'h. Piv 'oar ? Un diaman amañ, unan all aze... Yann-Vari en dije kaset anezhañ da sutal...

**SKARZHADGOU**

Ar gwashañ eo diouzh ar Gwener 29 eo c'hoarvezet. Evel bemdez tro 5 eur, en em vod 300, 400 a dud evit sellet ouzh an archerien o vont kuit

gant an eil ti-kêr. Evel bemdez ivez e weler mein o nijal grenadennoù o tarzhañ. Met d'ar Gwener-se ned eont ket kuit diouzhtu. En em gavout a ra un armead soudarded dre a-dreñv hag a grog da skeifl raktal hep gourc'hemenn. Ne sellont ket piv a zo aze, bugale, tud kozh. Evito n'eo nemet kig mat da skeifl war c'horre. Kas a reont 11 a dud ganto da Bontekroaz. Ken fants eo bet maz eo chomet sebezet ha strofset an holl a oa aze, met un eilenn nemetken rak kerkent ar gounnar a sav war-c'horre hag an holl - ar merc'hed dreist-holl - a zo prest da vont da Bontekroaz gant ar fuzuilhoù.

Pa ne vefe bet Annie Carval, Amelie Kerloc'h hag ar maer o sioulaat an dud hag o tisplegañ ne c'hortozer an archerien hag ar prefed Jourdan nemet an dra-se, e kemere an holl hent ar c'hloerdi, ken bras an dispien o c'hreiz. "Re bell int aet aze, kalz re bell" a lavare an holl. Amelie Kerloc'h hag Annie



# MANIFESTADEG AN T.S.A.B. E MONTROULEZ, D'AR 15 A VIZ MEURZH EVIT:



Luc'hskeudenn Lukian KERGOAT

- UN AOTREEGEZH (UL LISAÑS) WAR AR BREZHONEG HA POSTOÙ KELENNERIEN.
- AR C'HUZUL-ALIAÑ WAR AR SELLED HA KLEVED BET PROMETET GANT AR CHART (CONSEIL CONSULTATIF DE L'AUDIO-VISUEL).
- UR SIKOUR A-BERZH STAD DA ZIWAN ARAOK MA VO LAKAET ER SERVIJ KELENN OFISIEL.
- MISTRI "VALEERIE" EVIT AR SKOLIOÙ KENTAÑ DEREZ
- UR STATUD OFISIEL EVIT HOR YEZH HAG HOR C'HULTUR.

Penaos dont a-benn da lakaat hor yezh hag hor c'hultur da gaout e Breizh ar plas o dije ranket kaout a-viskoazh, evit ma c'hellimp-ni bevañ e-giz Bretoned e-barzh hor bro?

Pa seller ouzh istor ar stourm evit ar brezhoneg e c'heller gwelout omp bet tro ha tro oc'h ober goulennoù pe diskleriadurioù bras, hep na vije bet cheñchet kalz an traoù. E manifestadeg Pondi (miz Du 1972), n'eo ket goulennoù a voe graet, met, diwar ali Skol An Emsav, e voe graet un diskleriadur, anvet abaoe "diskleriadur Pondi", evit lavarout : "gwir ar vretonec eo ober o-unan war-dro o sevenadur ha kement tra a sell outo. N'eo ket da Baris da ren e-barzh hor bro". (Embannet eo bet an diskleriadur e-barzh BRUD niverenn 42, nevez-amzer 1973, pajenn 99).

Er c'hontrol e manifesta-deg Gwengamp, e miz Here 1975, e oa ur roll hir a c'houlennoù evit ar skol, ar radio-tele, ar vuhez ofisiel.

Ne seblant ket e vefe bet efedusoc'h un doare eget unan

all. Manifestadegoù un devezh ne oant ken, ha moarvat n'int bet gouest nemet da sachañ a-walc'h evezh an dud da zegas deomp "Chart Giscard". Daoust ma oa deut bewech meur a vil a dud, ne oa ket bet diazezet ur c'heñver-nerzh (rapport de force) bras a-walc'h, nag ur stourm padus evit lakaat ar galloud da blegañ.

Met, goude un ehan hir ha mare ar "Chart", setu deut adare mare ar goulennoù resis. Evit mont pelloc'h e rankomp da gentañ bezañ gouest da dre-c'hiñ war boentoù resis ha diazezet evel an aotreegezh vrezhonek. Evit-se e vo dav deomp derc'hel gant ar stourm ouzhpenn un devezh o kavout an doareoù gwellañ da bouezañ war ar pennoù bras hag ar galloud.

Daoust hag unan eus an doareoù gwellañ n'eo ket da gentañ, bezañ mennet d'ober implij eus ar brezhoneg e pep lec'h ha da sevel drezomp hon unan ar pezh a vez nac'het deomp, diwar skouer skolioù Diwan ?

Tangi Louarn

## PIV 'ZO E-BARZH AN TALBENN ?

Daou strollad nevez 'zo deut e-barzh an Talbenn e miz C'hwevrer - SNI-PEGC ar Morbihan (da lavarout eo mistri-skol ar skolioù-stad); - SNETP-OGT akademiezh Roazhon (da lavarout eo sindikad OGT ar skolioù teknik).

Ar strolladoù all 'zo :

- AR FALZ
- G.E.R.I.B.
- PARTI SOCIALISTE (P.S.B.R.E.I.S.)
- P.S.U. Breizh
- R.T.B.
- SCEN-CFDT
- SKOL AN EMSAV
- SNET-OGT ha SFRT-OGT FR3 Breizh ha Broioù al Liger
- U.D.B.

Ur skrid gallek evit ar gerent bugale er skolioù 'zo bet embannet gant an talbenn: "Pas de Bretagne, sans culture bretonne". Moaien 'zo goulenn anezhañ digant Skol An Emsav, 8, straed Hoche, 35000 ROAZHON.

## TALBENN ARAOKOUR

BEVAN, LABOURAT, STUDIAN, BEZAN MESTR E-BARZH HOR BRO.

### ROLL AN ABADENNOU

- Eus an 11 d'an 13 a viz Meurzh : abadennoù a bep seurt e pep lec'h e Breizh.

- E MONTROULEZ : + D'ar Gwener 14 da noz e-barzh an ti-kêr : kendiviz ha tabut gant tout strolladoù an talbenn diwar-benn ar brezhoneg, ar gallo, kultur Breizh hag o flas e-barzh buhez ha stourmoù hor pobl.

+ D'ar Sadorn vintin da 9 pe 10 eur : lakaat hor sevenadur er vuhez pemdeziek, abadennoù a bep seurt e kêr : kan, sketchoù, filmoù, chekennoù brezhonek er stalioù pe war ar marc'had, dileuridi er servijoù publik, en M.J.C., en ospital, er skolioù.

+ D'ar Sadorn goude lein, sal Aoregan : EMVOD MEUR.

2 eur ½ : kanerien, c'hoariva.

3 eur ½ : prezegenoù en anv an holl strolladoù, dibunadeg er straedoù.

+ D'ar Sadorn da noz : FEST NOZ, gant standoù ar strolladoù.

# fest noz Montroulez

d'ar sadorn 15  
a viz Meurzh



evit Diwan

# Gouel ar Brezhoneg 1980 e Plabenneg: 14-18 a viz Mae

Gouel ar Brezhoneg, savet 6 vloaz 'zo gant an aozadurioù sevenadurel breizhek, AR FALZ, BYV, ha Skol An Emsav, a gendalc'h da vevañ a vloaz da vloaz dre Vreizh-Izel a bezh. Bep bloaz eta e cheñch lec'h hag an dra-se a ziskouez ur wech c'hoazh youl an holl Vretoned pa vijent eus Leon, Kerne, Treger pe eus Gwened da chom da vevañ er vro.

Dalc'het eo bet e :

Gwengamp e 74  
Kastell Paol e 75  
Pont'n Abad e 76  
Karaez e 77  
Zinzag Lokrist e 78  
Roc'h Derrien e 79

Ar bloaz-mañ eo e Plabenneg e vo dalc'het Gouel ar Brezhoneg eus ar 14 d'an 18 a viz Mae 1980, savet gant Skol An Emsav gant sikour "Kroazhent", ur strollad sevenadurel eus Plabenneg hag ivez gant sikour emsaverien a youl vat eus bro Vrest.

Disheñvel e vezo Gouel ar Brezhoneg ar bloaz-man eus reoù ar bloavezhioù tremenet. Un dremm nevez en devezo, par da hini an em-sav evit yezh ha sevenadur Breizh ha ne baouez ket da vont war-raok. Er c'hontrol diouzh ar pezh 'zo bet tu da lenn war gelaouennoù 'zo, ne vezo ket pedet (di-war diviz azerien Gouel ar Brezhoneg : SAE, Kroazhent) an aozadurioù pe an aferioù bras, ur pal kenwerzhel ganto.

Spered Gouel ar Brezhoneg, divizet e 1974 gant an aozadurioù AR FALZ, BYV ha Skol An Emsav a chomo evel ma oa : "Gouel ar Brezhoneg n'eo ket ur meeting.

## SKOL AN EMSAV

PETRA EO HOR SONJ :

Ur bobl 'zo e Breizh. Emañ hi o stourm da chom bev. O stourm evit-se enep ar galloud kapitalour hag impalaerour a zalc'h da waskañ al labourerien, da rivinañ ar vro, da lazhañ sevenadur Breizh ha dreist holl ar brezhoneg.

Ni a fell deomp ec'h adsave hor pobl. Adsevel pobl Vreizh a dalv evidomp diskar ar gopitalouriezh ha sevel en hor bro ha gant pobloù all ar bed ar sokialouriezh a roio an tu da bep hini da vout nestr war e vuhez ha da bep pobl d'en em ren hec'h-unan.

Yezh pobl Vreizh eo ar brezhoneg, yezh ar bobl eo -daoust maz eo ar galleg hag ar galleg yezhoù ul lodenn ivez. E varve ar brezhoneg e vefe gwasket muioc'h c'hoazh labourerien hor bro hag aesoc'h ober gounid diwar o c'houst. Sed e soñj deomp eo ar brezhoneg ur benveg ret da vont enep hon distruj, da nac'hañ ha da ziskar ar sistem hon gwask ha da sevel pobl Vreizh en he frankiz.

PETRA A FELL DEOMP :

Dc'h implij ar brezhoneg e

Ur gouel eo, hollvrezhonek. Arouez eus youl labourerien Vreizh da vevañ en o bro, arouez o youl ivez da larout o soñj evel ma karont, hag er yezh a zo o hini".

Gouel ar brezhoneg a ziskouez ur bobl o stourm ha n'eo ket ur marc'had ur stourm, n'eus forzh pehini e vefe.

Dazont ar brezhoneg a vo hervez pezh a raimp evitañ ! Deomp-ni eo da lakaat anezhañ da vevañ e kement lec'h ma c'hellomp bezañ. Deomp-ni d'ober dioutañ ur benveg stourm sokio-ekonomikel evit gelout chom da vevañ er vro.

Skol An Emsav

Gouel ar Brezhoneg :  
14 - 18 a viz Mae 1980.

Roll an abadennoù war vBremañ niverenn 1.

Ur staj a vo dalc'het e Plabenneg evit sevel standoù ar gouel, kenzaot gant Skol An Emsav hag Atelier de Recherches et d'Etudes Audiovisuelles eus roazhon.

Skrivañ da : Skol An Emsav, 4 straed Sant Vazhe, 29000 KEMPER.  
Pellg. : 95.59.70.

fell deomp lakaat pobl Vreizh da vezañ mestrez war he buhez :

1 - En ur lakaat ar brezhoneg da yezh diabarzh Skol An Emsav, hag en ur reiñ tu d'ar Vretoned yaouank da gomz brezhoneg koulz er gêr hag e lec'h all.


2 - En ur grouiñ ar binvioù da gas hor stourm war-raok : sevel kreizennoù e pep lec'h, reiñ lañs d'ar vuhez vrezhonek dre gentelioù a bep seurt, stourmoù evit lakaat ar brezhoneg da vezañ implijet er vuhez publik, emodoù, devezhioù-studi, skol ar vugale, beilhadegoù, gouelioù...

3 - En ur embann brezhoneg : kelaouennoù, levrioù, deiziataerioù skritelloù...

4 - En ur stourm enep ar stad impalaerour dre ziframañ diganti ar pezh a zo ret deomp da vevañ.

5 - En ur vezañ, dre ar brezhoneg, e penn-araok stourmoù pobl Vreizh enep ar c'horvoenezh hag ar gwaskerezh, evit he frankiz, gant ar strolladoù hag ar sindikadoù a zo ouzh he difenn.

Ur stourm pemdezic hag hir eo hini Skol An Emsav. Gant ma vo e pep lec'h e Breizh, e kement kêr,



NUKLEEL

## danjerus ? tamm ebet !

Etre miz Ebrel ha miz Kerzu 1979 ez eus bet ganet e Harrisburg, ha tro-war-dro, 13 babig tapet gante un "hypothyroidie". Peadra 'zo da vezañ souezhet pa ouzer e vez rouez-meurbet ar c'hleñved-se e touez ar vugale nevez-ganet. C'hoarvezout a ra peurliesañ pa vez tud klañv dija e-barzh ar familh, pe pa vez distrujet "thyroïde" ar bugel a-raok e c'hannedigezh. Bepred e c'hoarvez ur seurt distruj pa vez lonket re a iod\* skinoberiant gant ar vamm. Menegomp e oa bet taget gant memes kleñved tud o chom e inizi Marshall (e Mikonezi, er Meurvor Habask), dek vloaz warlerc'h tarzhadenn ur vombezenn atomel amerikan, e 1954.

Menegomp c'hoazh, evit al lennerien n'o dije ket soñj ken, e oa ur gwallzarvoud e kreizenn nukleel Three Miles Island, e miz Meurzh 1979. Iod skinoberiant a oa bet skullhet dre ar vro d'ar mare-se. Digoret oa bet un enklask gant Burev ar Yec'hed Bro Bennisylvania, da c'houzout hag-efi e vije ul liamm bennak etre ar ganidigezhioù dic'hortoz-se

ha gwallzarvoud ar greizenn. Hervez spesialisted 'zo e vije bet ret d'ar skinoberiantiz bezañ mil gwech kreñvoc'h evit kaout un efed bennak war d"thyroïde" ar vugale. E-giz boaz, e soñj da Roueed nevez ar Skiant n'eus netra gwir ma n'eo ket bet komprenet ha displeget gante ; abalamour d'an dro-spered-se e vo sur-mat disklriet deomp 'benn nebeut ne oa liamm ebet etre an daou zarvoud, nemet un taoldegouezh fentus e vije.

Koulskoude n'eus ket peadra da c'hoarzhin pa ouzer peseurt kleñved eo an "hypothyroidie"-se : di-c'houest da sevel hormonoù ret dezho evit kreskiñ, e chomo ar vugale nammet, a gorf hag a spered. E-keñver an efedoù eo tost-tre ar c'hleñved-mañ ouz ar "mongolism" ; gwashoc'h c'hoazh e vije zoken, peogwir e chomo bihan-bihan ar bugel taget gantañ, ha disneuz war ar marc'had... Poltred Plogoiz an dazont ?

Mikael Duval  
(\*N'eo ket yod-kerc'h eo, eveljust !)

bourk, pe garter, kreizennoù o stourm ha tud o labourat asambles, e chomo bev pobl Vreizh hag ec'h adkavo he fersonelezh.

Mard eo kement-se ho soñj hag ho youl, deuit neuze da gas ar stourm-se war-raok gant Skol An Emsav.

Skol An Emsav

Stajoù a vezo aozet gant Skol An Emsav da vare Pask hag e-pad an hañv. Evit kaout titouroù, skrivañ da S.A.E., Rann ar Stajoù, 4 straed Sant Vazhe, 29000 KEMPER.

**SIKOUR PLOGO...**

Eugène Perrot ha Ronan Bourdon 'zo bet kondaonet ivez pep hini da 400 lur kas-tiz o vezañ maz int merourien ar G.F.A.

Ne ouezer ket peur e teuio ar prefed da glask ziskar ar c'hraou-defved. An dra-se a ziskouez memestra n'eo ket ken sur-se ar gal-loud eus e afer. Evit ar poent, Pierre Alain Condette a zo war e labour gant un hanter kant penn-dañvad bennak. Ra gendalc'ho...

Jil Killevere

**TAOLENN**

**NUKLEEL :**

- PLOGO, KOLWEZI, MEMES
- BREZEL !.....2-3
- DANJERUS ? TAMM EBET !... 5

**HAG HOR YEZH ? :**

- MANIFESTADEG AN FCPB E
- MONTRouLEZ..... 4
- GOUEL AR BREZHONEG E
- PLABENNEG..... 5
- SKOL AN EMSAV..... 5

**BREMAN :**

- KINNIG AR GAZETENN..... 6
- KOUMANANTIT !..... 6

**STAJ**  
**BREZHONEG**  
 St Evarzeg  
 8.13  
 a viz Ebrel

**BREMAN**

Kasit al lizhiri, ar c'hou-manantoù, ar bruderezh hag ar pennadoù da :

Bremañ  
8 straed Hoche  
35000 ROAZHON  
(pellg.:(99)30.90.15.)

Maketenn savet gant : Olier ar Mogn ha Kaorin Legrand.  
Moulet e ti-moulerezh al Lisoù e Roazhon.  
Fardet eo bet ar niverenn-mañ gant : Jil Killevere, Mikael Duval, Tangi Louarn, Joel Donnart, Mikael Baudu, Lukian Kergoat, Olier ar Mogn, Kaorin Legrand hag ar re all...

Rener ar gazetenn : Olier ar Mogn.

# BREMAN

## ur gazetenn nevez

Bep daou viz e vo kinniget deoc'h ur gazetenn nevez : **BREMAN**. Kavout a reoc'h warni Keleier diwar-benn ar stourmoù e Breizh hag e lec'h all.

Graet 'vo ar gelaouenn gant tud eus Skol An Emsav. Roet 'vo warni ar gomz d'an holl re a vez o stourm, en un doare araokour, war dachennmañ-dachenn. Klask a raimp lakaat warni ar pep pouezusañ eus ar vuhez sevenadurel, sokial ha politikel.

Un ezhomm bras a oa e-touez ar vrezhonegerien a vez kustum da lenn o yezh : kaout ur wir gelaouenn da lenn ha n'eo ket ur magazin bennak ouzhpenn. Setu ar pezh a glasko bezañ **BREMAN**. Klasket 'vo ivez lakaat ar vrezhonegerien n'int ket boas da lenn breznoneg da vezañ intereset gant **BREMAN**. Kavout a raint war **BREMAN** pennadoù skrivet en ur yezh yac'h, eeun ha modern war un dro.

Daouviziek e vo ar gazetenn er penn kentañ met hor pal a zo kinnig anezhi bep miz gant ma vo trawalc'h a dud o koumanantiñ.

**Koumanantit eta !**

**Skipailh ar gazetenn.**

# KOUMANANTIT !

Ma rit ho soñj koumanantiñ da v bremañ didroc'hit an tamm paper-mañ ha kasit anezhañ leuniet, asambles gant ho chekenn da :

Bremañ  
8, staed Hoche  
35000 ROAZHON

- ANV . . . . .
- ANV-BIHAN . . . . .
- CHOMLEC'H . . . . .

Koumanant reizh : 20 lur evit 6 niverenn  
Koumanant-skoazell : 30 lur (pe ouzhpenn)  
Koumanant broioù estren : 25 lur.